

“ CONSCRIT “ CASTEL-PAOL

I

Er Finister e zoun bet ganet
 Ha Castel-Paol eo va mam-bro :
 Ar vro gwella a ouffet kavet
 Ha kaera Tour 'zo tro-vardro.
 Me o c'harie, me o admire,
 Ken 'liez deiz 'ro Doue me lavare :
 « Me gar va c'hleuz alaouret
 Va Zour dantelezet. »

II

Mæs pa voe rentet d'in ar c'helou
 E zoa ret kuitat va maestrez,
 Ha mont da heuill an tabourinou,
 Dilezel tad ha tiegez....
 Me 'meuz champet ha lavaret :
 « Oh ! ne dan ket, ne dan ket, ne dan ket...
 Gwell eo va c'hleuz alaouret
 Va Zour dantelezet.

III

Hag e vijen me en em fachet
 Senti d'an urs me a ranke ;
 Tud cris a rea scouarn kalet
 Oc'h va daelou, va c'hlemmou-me
 Hag e c'hoarzet e voapaet,
 O lavaret : « Yvonic ? n'entend ket !
 — Kenavo kleuz alaouret
 Ha Tour dantelezet ! »

IV

En despet d'in-me er regimant
 En exercis, Yvonic paour !
 Ne m'oa na gout nag ententamant
 D'anaout james : droit ! demi-tour !
 Hag e troen 'vel ma sonjen....
 Dre ma troen gant anken e clasken
 Gwelet va C'hleuz alaouret
 Va Zour dantelezet.

V

Diouz ar gamel tam ne brofiten
 Treut ken a gwezen deuz va za...
 O vont varlerc'h ar c'horf me jome
 Bep cant pas d'en em diskuiza.
 Hag e voelen dre ma sonjen
 Marteze ken birviken ne veljen
 Siouas ! va c'hleuz alaouret
 Va Zour dantelezet.

VI

« D'ar paotr-ma n'euz nemet eur remed
 'Me an doctor : eur c'honje mad !
 Guelit hen : etrezec ar vered
 E kerz ar c'heas-paour timad. »
 Ha great e voe var ar ger-ze :
 « Dal da gonje, kea d'ar gær c'halesse
 Da gaout da gleuz alaouret
 Da Dour dantelezet ! »

VII

O va bro geas ! o bro binniget
 Setu me distro en ho kreis !!!
 Ra vezo da viken milliget
 An nep va c'hassfe deuz va Breis !
 O va Zad paour ! O va Mam gæz !
 O Jantonic ! va anter-tiegez !
 Gloar d'hor c'hleuziou alaouret !
 D'hon Tour dantelezet !